



# CANTIC SPIRITUEL

20

*Var an Abreje eus a Vuez SANT PAOL,  
Escop a Leon, renouvelet a nevez er  
bloas presant.*

*Var ton : Célebrons la Naissance, etc.*

**M**E ho suppli, Leonis, a bep condition,  
Gant honor ha respet pedomp oll hor Patron  
Sant Paol, pini so bet deomp ar c'henta Escop,  
Dre ma zoa un Tad mad evit gouarn ar bobl.

Guinidic oa a Vro-Saos eus a lignes puissant  
E dud er c'hassas d'ar scol a grouadur yaouanq,  
Da gouent Sant Ildut, eno en deus commancet  
Ambrassi Lezen Doue ha renonç cren d'ar bed.

Disqi a rea er scol Paol ar pez a gare,  
Ar scolaerien al memes dija a surpasse,  
Bete ma commanças da ober miraclou  
Patant dre e verit, qer ferm oa e bedennou.

Un deiz e oue casset da viret an dachen,  
Endra edo var e zaoulin oc'h ober e beden  
E teuas lapousset da zevori an hed,  
Sant Paol dre orêzon en deus-e destumet.

O c'has a ra en e raoc d'e vestr, pebes miracl!  
O anfermi en e lojen ne devoa na dor, na mat,  
Nemet eur gos rot car a laqas d'e stanqa,  
Dre bermission Doue e ranqent chom enna.

E vestr qen estouet pa oue dezàn annoncet,  
Hac o velet el lojen qement a lapousset :  
Chetu amâ al loened o deus débret an hed,  
Roit dezo punition, p'o deus-hi meritet.

Ildut o contempli miraclou so qer bras,

( 2 )  
A respont da Sant Paol : me vel emboc'h e graç ;  
C'houi oc'heus digant Doue, allas, me nemeus qet  
Ar c'haç hac ar pouvoar, evel oc'heus-u bet.

O clêvet e veuli ha comz a zeurt histor,  
E dad en bêr amzer en tennas eus ar scol ;  
C'hoant en devoa da ober anezàn un den a lez,  
Paol enem roet da Zoue en deus heuillet e vouez.

Quittât a ras ar Zant demeus a dy e dad,  
Ma oue den a Ilis o receo an urzou sacr.  
Prezeg a ra d'ar bobl partout an Aviel,  
Nombr bras a gonvertissas er vro-se e pep carter.

Ar Roue Marc erfin, o clêvet e veuli,  
A laçs e guemen, da zont d'e gaout d'e dy ;  
Neuze e fellas dezàn e laçat da Escop,  
Dre ma voa den santel, evit instrui ar bobl.

Sant Paol ne glasqe qet james an beñoriou,  
Nac eur garg qer pouner, ma quittaas ar vro,  
Gant compagnunou all souden ec'h ambarças,  
Da vont en hano Doue elec'h ma carje o c'haç.

Ep gouzout pelec'h e zent, erfin e ouent rentet  
E qichen eur gouent a voa enni Seurezet :  
C'hoar Sant Paol a voa enni ar Superiorez ;  
Pa voant eno en em gavet pebez joa ha carantez !

O velet oant er gouent gant ar mor pertuplet,  
Sant Paol dre e beden en deveus-e exilet.  
Qent evit ma partias e ras eur miracl bras :  
Cass a ras diouc'h ar gouent ar mor pevar mil bas.

Ar spaç a dri dervez e chomjont er plaç-se,  
Neuze e rejont o c'himiad, ma qemeraz conje  
Sant Paol digant e c'hoar, glac'haret o c'halon ;  
P'en em guitejont e teuas en neuze en douar Leon

Qenta w'en em gavjont voa en enez Eussa,  
Ma tisqenjont en douar da gomang batissa

Chapel da bedi Done, hac ive lojennou  
Evit en em loja endra ma chomjont eno.

Un Eal eus an ên d'ar Zant a revelas  
Ne falle get da Zoue e vije eno e blaç:  
Souden ec'h ambarqjont hac e teujont manifiq,  
Da baros Guinevez o touara er C'herniq.

N'oant get bet pell eno na oue adare  
Revelet da Zant Paol gant un Eal eus an ên  
Prepari ambarqi ha mont var ar mor bras,  
Hac e ouent coudret da êruout en Enez-Vas.

Êruet en enezen, o devezus rancontret  
Lod eus a dud ar C'hont, hac o deus goulennet  
Piou oa ar mestri er vro se, hac o deus respontet:  
Ar C'hont Guyturus eo, un den so redoutet.

Sant Paol a yas d'e gaout d'ar guær a Occismor,  
Da renta e respejou dezàn gant calz a henor:  
Neuze e roas d'ar Zant ar C'hont permission  
Da guemeret eur plaç en dezir e galon.

Ebars en Enez-Vas e rejont e ber amzer  
Batissa un Ilis da bedi hor Zalver;  
N'ouffet get exprima peguer bras oa santelez  
A reont e douar Leon, qercoulz hac en Enez.

Ar bobl a voa e chagrin, glac'har ha nec'hamant,  
Dre ma zoa en Enez-Vas un dragon, eur serpent,  
Peini a rea eur ravach hac a voa bras meurbet,  
Devori a rea an dud qercoulz hac al loened.

O velet e veve Sant Paol e santelez,  
E teuas nombr bras a Leon d'e gaout d'an Enez,  
D'e bedi, d'e supplia da gaout ar vadelez  
Da zelvra ar vro eus a eur seurt tristidiguez.

Accordi a reas dezo ar Zant ho goulens;  
Un deiz goude beza celebret an Oferen,  
Un dijentill hac en, bep tenna e ornament,

Enem rentjont o daou e tal toul ar serpent.

Sant Paol a gommandas dezàn neuse souden  
Sortial eus e doul hep ober drouc da zen,  
En instant e sortias, estranch oa e velet,  
A hirder en devoa triguent troatad hed.

Ar sqant a yoa var e dro yoa calet ha brutal,  
Dre ma tene eus e doul e treuzent an douar,  
Ouspen e taole tan, hac a voa effroyabl,  
Dre ziscouarn, dre c'binou, dre fri dre zaoulagat.

Sant Paol incontinant en deveus-en stoliet,  
Hac en roas da zerc'hel da Kergorn na dec'h qer,  
Ma zejont ganta o daou d'ar pen pella an enez,  
Da rêy dezàn e zetang ha d'ober e broces.

Ordren a reas d'al loen enem brecipita  
Neuse-souden er môr, hep james sortia;  
Ar plaç-se a c'houdevez betec an heur present  
So galvet gant ar bobl certen toul ar Serpent.

Ar bobl partout e joa, e laouenediguez,  
O veza delivret eus ar seurt tristidiguez,  
A reqete d'ar Zant mil benediction,  
Ma oue concluet e choas da Escop a Leon.

Sant Paol a refusas qemeret ar garg-se,  
Dre drompl e oue casset da bales ar Roue,  
Ha neuze hep contesti e oue sacret Escop  
En Escopti Leon evit gouarn ar bobl.

Pa êruas en Occismor pebes magnifiçanç!  
An oll, bras ha bian, a rea rejouissanç,  
O receo d'o Escop Sant Paol an den santel,  
Eur profit bras a reas dre Leon e bêr amzer.

Laqat a reas souden batissa couentchou,  
Peder ebars e Leon, hac ober Paressiou,  
Laqat ive Personet ha Bêleyen santel,  
Evit instrui ar bobl hac annonç an Aviel.

Ar brud eus e zantelez hac eus e viraclou  
 En em scuillas timat e pêvar c'horn ar vro ;  
 Eur mareat Paressiou en Escopti Quimper  
 A voa persecutet gant eur Serpant cruel.

O velet en devoa bet Sant Paol hon Escop  
 Eus a gaptivite tennet e Leon ar bobl .  
 E reuas nombr bras d'e gaout er guez a Occismor ,  
 D'e bedi gant respet ha gant calz a henor.

Da zellet outo a druez ha gant compassion ,  
 Dre ma oant persecutet, siouas, gant un dragon,  
 Pehini a zevore an dud hac al loened,  
 Na noz na deiz ne allent chom e paciantez.

Accordi a reas Sant Paol dezo o goulen ,  
 M'en em rentas ganto er Faou neuze souden ,  
 Hac eno e clêvas peleac'h certenamant  
 E rea demeuranç er vro se ar Serpant.

Mont a reas gant Sant Paol nombr a asistantet ,  
 Evit disquez dezàn peleac'h edo an andret ,  
 Hep e credent tostât, distrêy a rent adrien ,  
 Ne deas nemet Sant Paol hac e ni Sant Jaoue.

Evel mac'h êrújt , e commandas dezàn  
 Hep ober droug ebet eus e doul sortia.  
 Ar bobl oc'h e velet a dec'he , a grie :  
 Allas ! Escop santel perissa a reot aze.

Caer en devoa ar Serpant tortilla ha fringal ,  
 Tàn horrubl a daole qen a zêve an douar ,  
 Hep ober droug ebet gant Sant Paol e oue stoliet,  
 M'en roas da Zant Jaoue, an ol oue estonet.

Chom a reas ganto reis evel un aneval ,  
 Staguet e voue oc'h eur vas a blantjont en douar ;  
 Ar bobl a requette mil benediction ,  
 Ha mil bennos d'ar Zant eus a greis o c'halon.

Neuze e clêvas Sant Paol petra oa ar gomman  
c. mant,

M'o devoa da guenta guelet eno ar Serpant;  
Daou zen gant un Autrou er plaç-se a oue lazet,  
Hac a voa abaoue e speret trelachet.

Sant Paol a lequeas qemen an dijentil,  
Pa deuas a zirazàn edo gantàn al loen vil,  
Ar Zant oc'h e groasa en deveus bet chasset  
E presanç calz a bobl dioutàn an drouc-speret.

Sant Paol a reas dezàn un harang . eur zarmon,  
M'en em gonvertissas , touch a reas e galon ;  
Ne zonje e netra . nemet en Doue bemdez,  
Lequat oa var an hent eus e zilvidiguez.

E presanç hon Escop an Autrou-se a foas  
Da drugarecat Doue leve ha madou bras,  
Evit laqat batissa un Ilis var ar plaç,  
Ha peini a c'halver ato Abati Daoulas.

Goude e gonvertissa gant ar seurt miracloù,  
Sant Paol ha sant Jaoue a zeuas etreze o bro,  
Ar Serpant var o lerc'h var boues ar stol ato,  
Hep o devoue arret qen na oa en Guimilliau.

Neuze e veljont daou zen o tont en eur grial:  
Escop Leon den zantel, n'e qet echu hor glabar,  
Ur Serpant so c'hoas chomet eno er memes plaç,  
Distroit en hano Doue d'e denna dre ho craç.

Eno e reas Sant Paol ur miraclo so patant,  
Otont da goumandi en instant d'ar Serpant  
Mont da vit eguile ha dont incontinant  
D'o c'haout er memes plaç hanvet Coat ar Serpant.

Ne oue qet pel na êruas eno an daou Serpant,  
Hac e ouent oc'h ar stol staguet en un instant.  
Mont a rejont o daou ganto da Enez-Vas,

Staguet e ouent o daou er plaç-se oc'h eur vas.

Brema-ta, Qernevis, Plougastel, Loperch'het,  
Dirinou, Hirvillac, Logonan hac Hanvec,  
Sant-Thomas, Daoulasis, o pet memor bepret  
A Zant Paol hon Escop, p'en deus o telivret.

P'en deus bet ar vadelez da recours ho corfou  
Pedit-én da gaout chonch demeus oc'h eneoù,  
Da bedi evidoc'h hor Zalver beniguet,  
Mac'h ellot e fin ho puez mont d'ar gloar d'e velet.

An daou Zerpant cruel staguet en Enezen,  
Dre m'o devoa en douar plantet oc'h eur voalen,  
A zalc'has ar Zant outi o daou da berissa,  
Abars nebeut amzer e zejont da netra.

Ar bobl dre guementse partout incontinent,  
Dre ar miraclou caer en devoa great ar Zant,  
Distruja tri Zerpant a rea eur ravach bras,  
Hac hanvas an enezen, m'e galveur Enez-Vas.

N'ouffet qet exprima qeit ha ma e bet Escop  
Ar profit bras a rea e Leon etouez ar bobl;  
Ouspen e zantelez e rea calz miraclou,  
Ar sourci en devoa eus an ol eneoù.

Qent evit ma varvas en doa profetiset,  
Goulc'hen a achevo ar pez ameus commancet,  
En eur recommandi dezàn an Escopti,  
Eus a eneoù ar bobl qemeret ar sourci.

Erfin e oa deut coz m'en devoa poan o vale,  
An heur a zidostea da renta e ene,  
Ebars en Enez-Vas e tecedas hor Zant,  
An daouzecvet a Veurs, oajet daou vloas ha cant

An deiz-se a c'houdevez a so gouel e Leon,  
En enor da Sant-Paol hon Escop, hor Patron.  
Pen deus bet en e vuez ar garg an eneoù,

Pedomp-en da gaout sonch ac'hanomp er joayou.

Goude ma voa maro e savas disput bras,  
Etre pobl Occismor hac ar re Enez-Vas,  
Da c'houzout gant pere e zaje corf ar Zant  
Da veza enterret, ô pebes nec'hamant!

Daou gar neuze-souden a oue prest preparet,  
Ha lequeat lost oc'h lost. Ar c'horf a oe laget  
E creis etre an daou gar, ha casset al loened  
Eleac'h ma carje Doue e vije enterret.

Dre bermission Doue e teuas ar c'horf er c'har  
Evit beza enterret en Ilis Cathedral;  
Neuze e chenchas a hano ar guær a Occismor,  
Galvet ar gear a Leon, petramant Castel-Paol.

Gant solanite vras ha gant magnifiçanç  
Oe enterret he gorf e Leon en assuranç;  
Ar bed oll coz ha yaouanq a regrette hor Zant,  
Memes partout e Leon, ô pebes nec'hamant!

Rac-se eta, Leonis, n'ancounahait qet  
Madelezou Sant Paol bepret en hon andret;  
Desqet en deus e Leon an hent d'ar Barados,  
Pedomp-en da gaout chonch ac'hanomp deiz ha  
noz.

Bemdez hac alies eus a greis hor c'halon  
En em recomandomp da Sant Paol hor Patron,  
Ma zaimp ol dre e voyen erfin eus hor buez,  
Da veuli hor Zalver en e Rouantelez.

FIN.